

ALAMAGN HAG AR STROLLAD NAZI EDAN REPUBLIK WEIMAR

1/

Ma mamm a zalc'he da lâret deomp eh oa bet kollet ar brezel da Alamagn daoustou d'he soudarded bout bet ar re galonekañ.

Ur peoc'h ifamus a oa kaoz mah oa diframmet ar vro. Lakaet e oa ekonomiezh ar vro en dañjer get an dleoù brezel a c'houlenne hon eneberion kozh genomp paeiñ dezhe. Klevet e veze an dud en oad é fachiñ diâr-benn an taputoù mouk a veze er Reichstag, ha kompren a raemp eh oa ar partioù, hag a zizunane Alamagn hag an Alamaned, an hani a oa kaoz d'an dizurzh-se. "Gwezharall, e amzer an Impalaeriezh, ne save ket an Alamaned enep d'an eil egile. Moaien en deze an den dougiñ randon bout alaman" a lâre ur vaouez gozh.

E-touezh ar gwalloù en em glemme ar re vras a-ziârnezhe eh oa an dilabour. Grataat a ras an nazied lakaat fin d'an dilabour ha da zinez 6 milion a dud, ha me o c'hredas.

Melita Maschmann, ezel ag ar Yaouankiz Hitlerian (17 vlez e 1933).

3/ Programm an nazied

- Goulenn a raomp groñs, doc'h en em ziazeziñ àr an droed he deus pep pobl da zisposiñ anezhi hec'h-unan, ma vo tolpet rac'h an Alamaned en un Alamagn Veur.
- Goulenn a raomp groñs ma vo anavet d'ar bobl alaman ar memm droedoù get ar broadoù arall, ma vo torret feurioù Versailles ha Saint-Germain.
- Goulenn a raomp groñs ma vo roet tiriadoù da Alamagn evit magiñ hor pobl ha staliñ ar re-veur ag hor poblañs.
- Ne c'hell bout keodedourion nemet ar re a zo ezel ag ar bobl. Ne c'hell bout ezel ag ar bobl nemet ar re o deus gwad alaman, daoustou pezh relijion int. Rak-se ne c'hell Judev erbet bout keodedour.
- Ma ne c'hell ket ar vro-mañ magiñ rac'h an dud a zo enni, e vo ret bountiñ er-maez anezhi ar re nend int ket keodedourion.
- 12-13. Goulenn a raomp ma vo lamet rac'h ar gounidoù brezel a-zeget ar re o deus-int bet, ma vo broadelaet rac'h an embregerezhioù a zo hiziv e piaou da d-trustoù.
17. Goulenn a raomp ma vo graet un adreizh-douaroù.
20. Ret eo ma vo bountet spered ar vro e pennoù ar vugale-skol.


Tammoù tennet a brogramm ar strollad nazi, C'hwevrer 1920.

6/ Ar batroned vras hag an nazied


N'omp ket-ni, er firm Krupp, ideelourion : ema hon treid àr an douar genomp. Ni hor boa ar gredenn en dehe bet roet Hitler deomp an tu da ziorren a-feson. Ni a faote deomp kavout ur sistem en dehe bet kerzhet mat hag en dehe roet ar moaiendoù deomp da labourat plaen, evel ma faote.

Pennad tennet a destoni Krupp, en arbenn a brosez Nuremberg, 1946

7/ Ar bouezherezhoù e Alamagn etre 1919 ha 1933



Date	Value
Gourenev 1914	4,2
Genver 1919	8,9
Genver 1920	64,8
Genver 1921	76,7
Genver 1922	191,8
Genver 1923	17 792,0
Gourenev 1923	353 410,0
Eost 1923	4 620 455,0
Gwenholoñ 1923	98 860 000,0
Gouel-Mikael 1923	25 260 208 000,0
15 a Galan-Gouiañv 1923	4 200 000 000 000,0



4/ Dregantaj an dud dilabour ha niver izili an NSDAP

5/ Orin sokial izili ar strollad nazi (NSDAP)

Micherioù	% ag ar strollad nazi	% ag ar gevredigezh
Micherierion	28,1	45,9
Implijidi	25,6	12
Àr o c'hont	20,7	9
Tud e karg	6,6	4,2
Kelennerion	1,7	0,9
Peizanted	14	10,6
Re 'rall	3,3	17,4

- Komunourion
- Sokialourion
- Kreiz
- Tu dehoù
- Nazied